

# KLASK A RAN HO TREMM

D. KLASK A RAN HO TREMM WAR ZOU- AR WAR VOR  
 VA DAOU-LA-GAO LEMM, VA HA-LON DI-GOR  
 HO KAVET MEUS KET ER GWEZ NAG ER PRAD  
 ER BLEU-NIOU A HED SELL EUR GALON VAD  
 N'INT NE-MED AR SKEUD EUZ HO KAERDER BRAZ  
 N'INT KET C'HOAZ AR BLEUD A RO-IO AN TOAZ

KLASK A RAN HO TREMM

JE CHERCHE TON VISAGE

DISKAN

REFRAIN

Klask a ran ho tremm  
 War zouar, war vor  
 Va daoulagad lemm  
 Va halon digor

Je cherche ton visage  
 Sur terre, sur mer,  
 Les yeux vifs  
 Le coeur ouvert.

Ho kavet 'm-eus ket  
 Er gwez nag er prad  
 Er bleuniou a hed  
 Sell eur galon vad;  
 N'int nemed ar skeud  
 Euz ho kaerder braz;  
 N'int ket c'hoaz ar bleud  
 A roio an toaz.

Je ne t'ai pas trouvé  
 Ni dans les arbres ni dans la prairie  
 Ni dans leurs fleurs qui attendent  
 Le regard d'un bon coeur;  
 Ils ne sont que l'ombre  
 De ta grande beauté;  
 Ils ne sont pas encore la farine  
 Qui donnera la pâte.

Ho kavet 'm-eus ket  
 En avel a sko  
 Nag en dour a red  
 Er wazienn vrao;  
 N'int nemed ar skeud  
 Euz ho puhez braz;  
 N'int ket c'hoaz ar bleud  
 A roio an toaz.

Je ne t'ai pas trouvé  
 Dans le vent qui frappe.  
 Ni dans l'eau qui court  
 Dans le joli ruisseau  
 Ils ne sont que l'ombre  
 De ta grande vie;  
 Ils ne sont pas encore la farine  
 Qui donnera la pâte.

Ho kavet 'm-eus ket  
 El labous a gan  
 Nag er pesk a sked  
 A lamm en dour glan;  
 N'int nemed ar skeud  
 Euz ho kalloud braz  
 N'int ket c'hoaz ar bleud  
 A roio an toaz.

Je ne t'ai pas trouvé  
 Dans l'oiseau qui chante  
 Ni dans le poisson qui brille  
 Et saute dans l'eau pure;  
 Ils ne sont que l'ombre  
 De ta grande puissance  
 Ils ne sont pas encore la farine  
 Qui donnera la pâte.